

Mission Commana

8-25 MIZ DU

Parresionis Ker,

*Hodie si vocem Domini audieritis,
nolite obdurare corda vestra.*

Ma klevit hirio mouez an Aotrou Doue, ne ret ket d'ezi skouarn vouzar : varc'hoaz a ve re zivezad.

Mouez an Aotrou Doue ho kalv bemdez var hent ar mad, hent ar baradoz.

Ar vouez-se, he c'hlevet ho peuz, hag e c'hlevet a reoc'h kalz krevoc'h, kalz nerzusoc'h epad an amzer-man.

He c'hlevet ho peuz p'on deus embannet ar Mission.

He c'hlevet a reoc'h dre vouez ar visionerien a zeuio da brezeg d'eoc'h ; dre vouez hoc'h eal mad, dre vouez ho koustianz.

He c'hlevet a reoc'h dre vouez ar c'hleier a dregerno evit lavaret deoc'h eo digor ar Mission evidoc'h *oll*. Oll ! klevit mad !

Evit kalz e vezo ar c'henta, hag evit kalz ar c'henta hag an diveza.

Evit hen ober mad — ha kazi guelloc'h e vije chom eb hen ober eget hen ober fall — eo red :

Da genta : Da bep rumad heulia pen da ben ar Mission, adalek an devez kenta da beteg an diveza ;

D'an eil : Goulen skoazel digant Doue, dre ho pedennoù, ho kantikou hag an oferen ;

D'an trede : Selaou ar prezegennoù gant evez hag eur guir c'hoant da brofita ouz komzou Doue ;

D'ar pevare : Lakaat urz vad en hoc'h ene dre eur govesion leal, gant eur guir gontrision pe glac'har deuz an amzer dremenet, kasoni deuz ar pec'hed ha guir volontez da dec'het outan en amzer da zont.

Deuet oll eta, parresionis ; rag Doue ho kalv oll, bihan ha braz, paour ha penvidik, kristenien vad, kristenien klouar, kristenien fall zoken, ma vije en ho touez ! Ar re vad a vezo guelleet, ar re glouar tomet, ar re all chanchet o c'haloun.

H. LAZARE, recteur.

P. PLOUHINEC, vicaire.